

Reolennoù Ti al lamponed

Règlement de la « Maison des canailles »

An aozer / L'organisateur Ti ar vro Landerne - Daoulaz

Kreizenn / Centre Théo Le Borgne
1, ru an doktor Pouliquen / 1, rue du docteur Pouliquen
29800 LANDERNE)AU
Pellgomz / Tel : 09.73.65.35.24 et 07.67.17.58.29
Chomlec'h postel / Mail degemer@tiarvrolandernedaoulaz.bzh



Renerezh / Direction Delphine SALAUN

07.82.87.79.22
Postel : kreizenndudi@tiarvrolandernedaoulaz.bzh
Remplaçante : Ninnog KERBIQUET

Chomlec'h ar greizenn dudi
Adresse du centre de loisirs :

L'accueil de loisirs est situé à :
Skol Sant Julian / Ecole Saint Julien
13 ru Brest / 13 rue de Brest 29800 Landerne)au

• **Enskrivadurioù / Inscriptions**

Degemeret e vo ar vugale brezhoneger skoliataet betek o 12 vloaz. Ar vugale d'an oad da 2 vloaz ½ a vo degemeret ma z'int skoliataet ha prop e-pad an devezh (lienoù a c'hell bezañ implijet e-pad ar c'houk)

Nous accueillons les enfants scolarisés jusqu'au jour de leur 12 ans. Les enfants âgés de 2 ans ½ sont acceptés s'ils sont scolarisés et ont acquis une propreté diurne (couches possibles lors des siestes).

A-raok enskrivañ ar vugale, trugarez da leuniañ ha da sinañ un teuliad enskrivañ hag ur fichenn yec'hedel dre vogel (ret e vo hizikaat an teuliad-mañ bep bloaz).

Avant toute inscription merci de bien vouloir compléter et signer un dossier d'inscription et une fiche sanitaire par enfant (ces documents devront être mis à jour chaque année).

Enskrivet eo ar vugale evit an devezh a-bezh pe evit an hanter-devezh gant ar pred ha **5 devezh d'ar muiañ a-raok an devezh dibabet er greizenn dudi**. En un doare dreistordinal e vo degemeret ar vugale evit un hanter-devezh hep pred.

*Les inscriptions se font à la journée où à la demi-journée avec repas et **5 jours au plus tard avant la date souhaitée à l'accueil de loisirs**. De manière exceptionnelle nous acceptons les demi-journées sans repas.*

Evel eo displeget e karta ar greizenn dudi eo ar brezhoneg yezh ar buheziñ er greizenn : goulenn a reomp digant ar vugale kompren ha respont e brezhoneg. **Setu e vo degemeret da gentañ bugale brezhoneger : ar vugale all a vo degemeret nemet ma c'hom plasoù**. Kinniget e vo lakaat o anv war ul listenn gortoz hag asantiñ o enskrivadur nemet **7 deiz a-raok an deiziad degemer er greizenn hervez an niver a blas dieub a chomo**.

Le projet pédagogique du centre précise bien que le breton est la langue de vie du centre de loisirs. Nous attendons des enfants qu'ils comprennent et répondent en breton. Afin de ne pas mettre les enfants non-bretonnants en difficulté, nous donnons la priorité aux enfants issus des filières scolaires bilingues : les autres enfants ne seront accueillis que s'il reste des places. Nous proposerons aux familles une liste complémentaire d'inscription et accepterons leur inscription seulement 7 jours avant la date d'accueil s'il reste des places libres.

An enskrivadurioù war an diwezhañ a vo degemeret hervez ar plasoù a chomo.

Les inscriptions tardives seront prises en compte en fonction des places disponibles.

Aotret eo renerez ar greizenn dudi da spisaat niver a vugale hervez programm ha niver a dud kirieg.

La direction de l'ALSH se réserve le droit d'ajuster le nombre d'enfants en fonction du programme et du nombre d'encadrants.

Nullañ un enskrivadur a zo da vezañ graet **1 sizhun** a-raok an devezh degemer raktreset. Ma z'eo ezvezant ar bugel abalamou eo klañv, trugarez da gas deomp un testenni mezeg. **Ma n'eus testenni ebet e vo fakturennet an devezh d'ar familh.**

*Les désinscriptions devront se faire au plus tard **1 semaine** avant le jour où l'enfant a été inscrit. En cas d'absence pour maladie merci de faire parvenir un certificat médical. En cas de non présentation d'un certificat, **les journées d'absences seront facturées.***

Cheñchamantoù stad ar familh, implijer, chomlec'h, pellgomz a zo da vezañ menneget buan. Memestra evit ar rannad tiegezhel, ma z'eus ur c'hemm bras, trugarez da gelaouiñ ac'hanomp. Hizikaet eo ar rannad tiegezhel bep bloaz ganeomp e penn kentañ ar bloaz (miz Genver)

Tout changement de situation familiale, employeur, adresse, téléphone doit être signalé très rapidement. Il en est de même pour votre quotient familial, s'il évolue fortement nous vous demandons de nous informer. Le quotient familial est mis à jour par nos services à la première inscription et chaque début d'année civile (janvier)

Posubl eo gweladenniñ ar greizenn dudi nemet pa z'eo digor, implijet eo ar salioù war an amzer-skol. Kuzuliet eo ober ur weladenn dreist-holl evit ar vugale nemet 6 vloaz. Un doare eo da eskemm ganeoc'h ha gant ho pugel ha d'ober anaouegezh gantañ.

La visite de l'accueil de loisirs est possible sur les temps d'ouverture de l'ALSH uniquement, les salles étant exploitées sur le temps scolaire. Une visite est conseillée surtout pour l'accueil d'enfants de moins de 6 ans cela permet d'échanger avec vous et votre enfant et de faire connaissance.

Evit kaout muioc'h a ditouroù eo posubl deoc'h mont e darempred gant renerez ar greizenn dudi dre vail pe dre bellgomz pe er burev d'ar meurzh. (chomlec'h a-us ar bajenn)

Pour toutes questions vous pouvez contacter la direction de l'accueil de loisirs par mail, par téléphone ou lors des permanences au bureau le lundi. (Coordonnées en haut de page)

• **Eurioù digor / Horaires d'ouverture**

Digor eo ar greizenn dudi bep merc'her e-pad an amzer-skol (nemet e-pad an devezhioù gouel) hag e-pad ar vakañsoù (nemet vakañsoù Nedeleg hag ur miz e-pad an hañv).

L'accueil de loisirs est ouvert chaque mercredi en période scolaire (sauf jours fériés) et durant les vacances scolaires (à l'exception de celles de Noël et d'un mois durant les vacances d'été).

Digor eo ar greizenn dudi adalek 7e30 diouzh ar mintin betek 6e30 noz.

L'accueil est ouvert à partir de 7h30 le matin et ferme à 18h30 le soir.

Degemeret eo ar gerent etre 7e30 ha 9e30 diouzh ar mintin hag etre 4e45 ha 6e30 d'an noz.

L'accueil des parents se fait de 7h30 à 9h30 le matin et de 16h45 à 18h30 le soir.

Evit an hanter-devezhioù : mont-e-barzh da 11e50 evit ar pred + abardaevezh / mont kuit da 1e15 evit ar mintinvezh + pred

Pour les demi-journées : arrivée à 11h50 pour repas + après-midi / départ à 13h15 pour matinée + repas.

⚠ **Ar mont e-barzh a vo graet dre dorikell glas plasenn Sant Julian nemetken. An dorikell-mañ a vo dibrennet nemet gant ur bizikod. Kaset e vo ar c'hod deoc'h dre vail. Cheñchet e vo pep prantad. Arabat ankounac'haat ar c'hod : ne vo nemet un animatourez gant ar vugale etre 7e30 ha 8e30. Ret e vo dezhi chom gant ar vugale : ne c'hello ket mont da zigeriñ**

⚠ ***L'accès à l'accueil se fera uniquement par le portillon bleu de la place Saint Julien. Ce portillon ne pourra prochainement être déverrouillé qu'avec un digicode. Le code vous sera communiqué par mail, il sera changé à chaque période. ATTENTION à ne pas l'oublier, car de 7h30 à 8h30 une seule animatrice sera présente et ne pourra pas quitter les enfants pour venir ouvrir.***

• **Reolennoù an enskrivadurioù / Les règles d'inscription**

Devezh kinniget evit an enskrivañ Jour souhaité d'inscription	Devezh diwezhañ evit an enskrivañ Jour de la demande au plus tard
Lun – Lundi / Meurzh - Mardi	Merc'her a-raok an degemer Mercredi précédent dernier délai
Merc'her- Mercredi / Yaou - Jeudi	Gwener a-raok an degemer Vendredi précédent dernier délai
Gwener - Vendredi	Lun a-raok an degemer Lundi précédent dernier délai

Ur goulenn enskrivañ kaset goude an deiziad dereat a lako 2€ ouzhpenn war ar facturenn (ur gresk 30% a zo lakaet deomp gant kegin kreiz Landerne pa z'eus dale gant an enskrivañ).

Evit ho kelaouiñ : pred ar vugale ezvezant a vo facturennet deomp evit un ezvezañs kantreizh.

Toute inscription survenant après la date limite engendrera un supplément de 2€ par journée ou demi-journée car les repas supplémentaires ajoutés après les dates limites nous sont majorés de 30% par la cuisine centrale de Landerneau.

A titre informatif, même les repas des absents justifiés nous seront facturés le premier jour d'absence (aucun surcoût répercuté auprès des familles)

• **Prizioù ar greizenn dudi / Tarifs de l'accueil de loisirs**

Evit bezañ er greizenn dudi eo ret emezelañ d'ar gevredigezh evit ar bloaz (ur emezeladur dre familh). Priz an emezelañ a zo 15€.

Savet e vo an emezelañ gant ho facturenn gentañ ha facturennet e penn kentañ ar bloavezh-skol war lec'h.

*Afin de pouvoir s'inscrire à l'accueil de loisirs il est nécessaire de cotiser à l'association pour l'année (une seule cotisation par famille sera demandée). Le montant de l'adhésion à l'association est de **15 euros**.*

L'adhésion sera prélevée sur la 1ère facture du centre de loisirs puis à nouveau en début d'année scolaire.

Kinniget eo ar prizioù gant ar c'hef goproù-tiegezh Penn ar Bed (KGT). Azasaet eo ar prizioù hervezh goproù ar familhoù (rannad tiegezhel : RT) - priz ar pred e-barzh.

Les tarifs sont ceux recommandés par la CAF Finistère en matière de tarification modulée en fonction des ressources des familles (quotient familial) - repas compris.

Priz d'an 1 a viz Meurzh 2023 betek cheñchamant an erbedadennoù.

Tarifs au 1^{er} mars 2023 jusqu'à changement des recommandations.

2023	QF - 450	451 - 700	701- 850	851 – 1050	1051 -1450	1451 - 1650	1651 et +
Journée avec repas Devezh gant pred	7.70 €	9,30 €	11.60 €	13.90 €	17,30 €	19,50 €	21,50 €
Demi-journée avec repas Hanter-devezh gant pred	5,10€	6.30 €	8.30 €	11,30 €	13.40 €	15 €	18,40 €

• **Doareoù da paeñ / Modes de règlement**

Kaset e vo ur facturenn deoc'h dre vail e penn-kentañ pep miz evit fraejoù ar miz paseet.

Vous recevrez une facture par mail au début de chaque mois pour le règlement du mois précédent.

Posubl eo deoc'h paeñ

- dre un dreuskasadenn amgefreak (SEPA) : ret e vo deoc'h leuniañ un urzh lemel ha reiñ ur daveenn vank (DAB)

- dre dreuskas-vank : kavout a reoc'h niverenn-anaout etrebroadel ar gont vank Ti ar Vro (IBAN) war ar fakturenn
- dre chekenn e anv Ti ar Vro Landerne Daoulaz

Il vous est possible de régler :

- *par prélèvements automatiques (SEPA) : pour ce faire il vous faut remplir le mandat de prélèvement et fournir un RIB du compte à débiter.*
- *par virements : vous trouverez l'IBAN du compte Ti ar Vro sur les factures.*
- *par chèque à l'ordre de Ti ar Vro Landerne Daoulaz.*

• Degemer ar familhoù / Accueil des familles

Evit ar mont e-barzh pe evit mont kuit eo ret d'ar bugel bezañ ambrouget gant un den deuet. Ret eo lavar d'an animatour kiriek d'ar verkañ eo erruet ar bugel pe e zaio kuit.

Lors de l'arrivée et du départ sur l'accueil de loisirs, l'enfant doit être accompagné d'un adulte et doit signaler sa présence et son départ à l'animateur responsable du pointage.

Ret eo d'ar gerent leuniañ mat al lodenn « aotreoù » war teuliad an enskrivañ.

Trugarez da vennegiñ d'ar skipailh animatourien ma z'aio kuit ur bugel gant un den a ne ket tad pe vamm ar bugel met gant un den menneget war an teuliad enskrivañ. **(Goulenn kas ur gartenn-anv gantañ)**

Les parents doivent remplir convenablement la partie « autorisations » du dossier d'inscription.

*Merci de bien vouloir indiquer à l'équipe d'animation lorsque l'enfant ne sera pas récupéré par ses propres parents mais par une personne mentionnée dans le dossier d'inscription. **(Lui demander de se munir d'un document d'identité)***



Lodenn asantiñ ar reolennoù-mañ

Asantiñ a reolennoù a ro an droad da vezañ degemeret er greizenn dudi.

Coupon d'acceptation du présent règlement

L'acceptation du règlement conditionne la fréquentation de l'accueil de loisirs.

Familh / Famille :

Anv – Anv bihan ar vugale degemeret er grezienn dudi / Nom-Prénom de (s) enfant (s) à l'accueil de loisirs :

.....

.....

Chomlec'h / Adresse :

Kelaouet omp bet eus reolennoù kreizenn dudi « Ti al lamponed ». Asantiñ a reomp outo.

Nous avons pris connaissance du règlement de l'accueil de loisirs, et nous l'acceptons.

D'ar / Le.....

E / A

Sinadur ar gerent / Signature des parents

Gant ar meneg « Lennet hag aprouet » - Avec la mention « lu et approuvé »